

Kas a barzh

## Ar plac'h a Rianteg

Selaouet holl ha selaouet  
Ur sonnenn a nevez sawet

*Ge, ge ge, ton larediredir, o  
Roulanla, ton laredireda*

Sawet ziàr plac'h a Rianteg  
'Ya de gofesat noz Nedeleg

Galan 'oe bet finoc'h e'iti  
Eñ yas en iliz iroki

Eñ yas er gadoer-gofesion  
'Wiskas kapelin er person

Plac'hig p'antre en toull kadoer  
Na sin ar groez he doe d'ober

« Plac'hig din-me a lârehet,  
A-c'houde pegourz ne oec'h ket bet ? »

« B' zo ahoude nav miz hantér  
Nend on ket bet 'n ho toull kadoer »

« Plac'hig din-me e lârehet,  
An absolvenn hag ho poe bet ? »

« An absolvenn n'em boe ket bet  
Ker re e karen ar baotred »

« Plac'hig din-me a lârehet,  
Piv eo hannañ 'n hani garet ? »

« Loeiz ar Skourzig a Gêrvihan  
Hannañ garen a c'hoazh e ran »

Ar c'homsoù-se p'hi doe lâret  
Komañset 'r c'hofesour de c'hoarzh

«Met bremañ e ouian-me mat  
Mañ man galan doc'h me c'hoa'esat !

Ha birviken d'rant ma vevin  
Koesat noz Nedeleg nend in ! »